

Sôn ar Goulen-Eured

Kân-bale Tregeriñ Gwingamp.

1

« Bonjour, bonn' femm' roït ho merc'h d'in, oh ! (bis)
Bonjour, bonn' femm' roït ho merc'h d'in, } bis
Ne vo ket maleurus ganen. }

2

Me zaï d'ar park da labourat, oh ! (bis)
Me zaï d'ar park da labourat } bis
Hi jomo 'r gear da luskellat. }

3

Da luskellat ha d'ober tan, oh ! (bis)
Da luskellat ha d'ober tan } bis
Da doma iod d'an hini bian. }

4

Me vo kountant 'fin ar sizun, oh ! (bis)
Me vo kountant 'fin ar sizun } bis
Me c'hellan kaout va zam butun }

5

Eun tam butun ha dek guenneg, oh ! (bis)
Eun tam butun ha dek guenneg } bis
C'houlennin ken digant va greg. }

6

Ha me vo fur betek mervel, oh (bis)
Ha me vo fur betek mervel, } bis
Ma c'hellan kaout ho merc'h Katel. » }

7

— « Va faotik keaz, va merc'h Katel, oh ! (bis)
Va faotik keaz, va merc'h Katel } bis
Ne vo ket roet d'eun den diboell. }

8

D'eun den diboell, d'eur feneant, oh ! (bis)
D'eun den diboell, d'eur feneant, } bis
D'eul lounker chist ha gwin-ardant }

9

Ar bleo zo savet en da zourn, oh ! (bis)
Ar bleo zo savet en da zourn, } bis
Kea d'ho rosti 'barz eun ti fourn. }

10

Da c'hodellou zo goullou-sac'h, oh ! (bis)
Da c'hodellou zo goullou-sac'h } bis
Kea d'eul leac'h all da glask eur plac'h. }